

(8, suite)

An Arvoric.

Salud, enor d'an Arvoric, d'am bro,
 E pehini ne zeus ha ne vezo
 Nemet potred a dalc'h hac a gourach.
 Salud enor d'am bro c'hoas ur veach;
 Oc'h e veuli birvigen na scuzin;
 Ja, me fell din, huela ma ellin,
 Brudi e c'hloar, ha lavaret d'ar bed:
 Evel va bro, nan, ne zeus bro ebet.

(9)

Pious na ve get glorius e galon,
 En eur sonjal e tisgen var eon
 Eus ar re-ont pere a danfoultras
 Ar Romanet gouechall dre onez vras,
 Da laret eo, eus ar C'hallaoued cos,
 Potret terrupl en deiz coulz hac en nos?
 Cetu eno goucoude, Breizidi,
 Ar goad a verr en hoc'h oll izili.

O Francisien! pe goelloc'h, mar qirit,
 Bris-Gallaoued, perac hon disprisit?
 Guir eo penos nomp get fichet erfad,
 Na ouzomp get marvailha deread;
 Mes bez ez omp franc ha leal atao,
 Ne reomp forz oes an avel, ar glas;
 Hac hor pennou, qer caled ha dero,
 A dal c'hoas mui equet ho re goullo.

(10)

Ja, m'en tou did, bro va c'hinivelez,
 Gent ma teuyo ar maro didruez
 Da zizec'ha va zeod em quinou,
 Me a gano bepret da veuleudiou.

366

Vit gementse n'em eus erom ebet
 Pedi nicun eus ar fals-doueet ;
 Te, ô va bro, pe ar sonch ac'hanout,
 A ell heppen va laqat da dizout.

Ha c'houi, pere oc'h eus gen alies,
 Hep tam truez glazet va c'halon quèz,
 Merc'hedl yaouanc eus a Vreiz-Arvoric,
 C'houi, dreist pep tra, merc'hed eus va c'hêric,
 Savid ive, savit gant ho taouarn
 Ho mouezjou ger douç d'am dioucouarn,
 Erit meuli ar vro en deus ho crêt
 Ger coant, ger fresq, hac ouzôn ger caled. fin.

fin

D'am Bro quèz e voestlan, gant va brec'h, va madou,
 An diverza eus va huanadou.

Nan, demeus va c'halon n'allan get da lemel
 Va bro, va bro mignoun : quell eo ganén mervel.

M. Lansalut.

(Vol. IV, p. 8-10.)
 5 str. numérotées.